


Prigent (en Antron perrin)

ANNOUDEGEZ-VAD EUR BUGEL

E KENVER ANN OTRO DOUE

HAG HE LAOUENIDIGEZ

ENN DE EUZ HE GONFIRMASION



War don : Ni hô salud a galon, miz Maë, miz bintget,...

1. — Ha p'am bije dek-mil bla da c'hom c'hoaz é bué,
Pénôz é c'halljenn awalc'h trugarékâd Doué,
Eûz mâd-obero ker brâz, eûz grâso ken dispar
Gred d'eur bugel ken iaouank, ken dister, ken digar!

2. — Kenta merk hé vadelez eo p'en deûz teurveet
Bean sonjet enn hon-mé, pa oann mann-mann-a-bed,
Roed d'in korf hag iné, kerkouls ha da bep d'en,
Ma gret, herve'r skritur sakr, hanval out-Han zôkén.

3. — A-vec'h oann deud er béd-ma, é c'hoantâz ma Doué
'Vijé lakêd hé c'hrâso da walc'hin ma iné,
Ma iné ker mastaret gand ar pec'hed kenta,
Gred, é baradoz terrestr, gand Adam hag Eva.

4. — Ma iné oé lakêt glân; plijout re da Zoué.
Eur paéron, eur vaéronez evid-on a gomzé :
Dre hô géno é touiz ne vijennu servijer
Na da Satan, na d'ar béd, mès hepken d'am C'hrouer.

5. — War-benn nébeûd blavesio, hep sonjal ken em lé,
Ma iné paour oé, sioaz ! mastared adarré;
Rak well é kaviz sélaou ali ann drouk-spéred,
Evit senti ouz Doué ; kouean rîz er pec'hed.

6. — Glac'hared oa ma c'halon ! Goulenn rîz trugare;
Ha kerkent oann dizammed, dre vadelez Doué :
Rak staged en deûz hé c'hrâs ouz komzo ar bélek,
Etré ar pec'her hag Hen lakêd da drédéek.

7. — 'Vel merk-anad oann gant-Han a neve-flamm karet,
D'azean ouz ann Dôl-Fask é oenn gant-Han pédet,
E lec'h ma teu Hé-unan, dré'r brasan madélez,
D'en em rei d'Hé vugalé evit magadurez.

8. — Hô trugaré, ma Doué, zô éta hep muzur!
Hag a c'hrâso hoc'h eûz c'hoaz da rei d'hô krouadur!
Nerzan meurbet ma iné ha tomman ma c'halon :
Sé eo ar pez a refed dré'r Gonfirmasion.

9. — Daouarn ann Otro n'Eskop, saved a-ûz d'am fenn,
A disk d'in 'man'r Spéred-Glân em c'halon ô tiskenn,
Gand hé holl donézono, zikourou ken nerzuz
'Vid ar c'hristen glask bean gand Doué évuruz.

10. — Ar seiz donézon gaer-zé, 'vel ma-z-int d'in disket,
A hall, enn hon iéz, bean dré'r c'homzo-man hanvet :
Furnez, Sklérijen-spéred, Skient-vâd, Gwiégez,
Nerz, Devosion, Doujans. Pébez pinvidigez!

11. — Ar Furnez a disk d'in skler on krouet gant Doué,
Nann 'vit plijadur ma c'horf, mès 'vid vâd ma iné :
Hén anaoud, Hé garoud, ouz hé lezen zenti,
O c'hortoz, 'vit ma digoll, mond d'ann Env d'Hé veuli.

12. — Ma spéred, bété vréman, n'hallé diski netra
Eûz ar gwirioneo brâz, ar ré talvoudeka;
Mès ar Sklérijen-spéred rai d'in gwelet skléroch
Ar pez a dlean da c'hout 'vit n'em salvi suroc'h.

13. — Ar Skient-vâd a rai d'in klask brâsan gloar Doué —
Ha kemend a zô gwellan 'vit salvi ma iné;
Anaoud a rin ivé kuzul ann drouk-spéred,
Trôidello ha pécho gant-han dré holl stignet.

14. — Dré'r Wiégez ma spéred a wélô muioc'h skler
Pégen dister ez on-mé, péger brâz ma C'hrouer,
Péger paour eo ar bed-ma, pinvidig ann Envo :
Hag a dùd, ré zivézad, souézed en em gavô!

15. — Dinerz oann bété vréman, kréna renn aliez,
Rak pep tra a glaské stourm ouz ma zilvidigez.
Ma Nerz bréman zô krenvoc'h 'vit ma énébourien,
Hag é tisprizan Satan koulz hag hé ziskibien.

16. — Péger brâz évurusded zô bréman em c'halon,
Aboé ma-z-eo 'vel beûet gand ann Devosion!
Seûl vui sonjan enn Doué, seûl vui ez eo laouen;
Hé veuli, he serviji : né c'hoantân mann ouz-penn.

17. — Pégen diskiend ez int ann néb a douj ar béd,
Pé komzo ha goapaérez nep sô gant-han trôet!
Rak Doujans Doué hepken é deûz talvoudégez :
Ober a ra hé garoud, dré m'eo holl madélez.

18. — Chétu mé peùrc'hret kristen dré gémend a c'hrâso,
Chétu zôkén mé zoudard da Roué ann Envo,
Dalc'hed da difenn lézen, énor ha gloar Doué,
Ha pa renkfenn kaout poan, pé riskan ma bué.

19. — Etré'r Spered-Glân ha mé zô 'ta gred eur marc'had :
Hén, derc'hel d'in he c'hrâso, mé, hô implian mäd.
'Vit né vezô ket torred, eo siellet râktâl :
Gand ann Eôl-sakr eur groaz a rer d'in war ma zâl.

GOUDE AR CONFIRMATION.

20. — Pégen talvouduz dévez! Trugaré, ma Doué;
Bété vréman n'eo ket bet ken laouen ma iné!
Héb arvar, mar 'n'em dalc'han er stâd-ma dé ha nôz,
E fin ma bué mé iel ouz-éun d'ar Baradoz.

PRGNT, Pⁿ S^l.

Dâ véan moulet ha kanet.

Sant-Briek, ann 29 dé a vîz Dû 1879.

P.-M. FRANCE, vikel-vrâz.

18. — (L'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.)
Quand verra-t-on ces deux hommes se séparer?
L'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! que l'homme se sépare de son Dieu!

19. — Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.

COUDE AU CONJUGATION.

20. — Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.
Hélas! l'Esprit de l'homme est en un moment d'égarement.

PREMIER, P. 28.

Imprimé chez M. LAFON.

Sous-Presses, n. 23 de la rue de la Harpe.

P. DE FRANCE, Libraire.

LAFON, IMPRIMERIE DE LA HARPE.

Adressé au M. P. Bluzen.